

84

CURUNAMANT

ANN ITRON VARIA-GUIR-SICOUR, E GOUENGAMP.

« Canoupl joaüs curunamant
» Inach Mari en ker Gouengamp. »

Crouadurez predestinet
Dreïst d'an oll groaguez ha merc'hel,
Dreïst d'an oll sent ha senteset
Dreïst ar puran serafinet.

An tan dimeus ho carante
O terc'hel da gresquin hemde
A rei an disparti fete
Entre ho corf hac oh c'hine.

An arc'hel Gab abeurs Doue
A zisquen seder eus an êv
A lar da Vari ar c'helo
Eus an de hac heur e maro.

Sevet, Mari, e me Jesus.
D'he Vam Goerc'hes caranteus,
Tremenet e ar gouân calet,
Deut da bales an Dreindet.

Enon e po eur gurunen
Oruet a daouzec stereden,
An heul evit guiscamant,
Al loar vo ho kouernamant.

An Ebestel a bresegue
An Aviel en peb contre
A so prest ha prompt douguet
Da dy ar Vam muian caret.

Neuse c'hoas d'ar memes istant,
E c'happaril flam ha contant,
Bisach Jesus d'he Vam santel :
« Deut ma Mam d'ar gloar eternal. »

Dre ar garante ar puran
E gouita Mari ar bed mân
M'e do caëran curunen
A obteno nicun biquen.

Jesus a ordren d'e aëlez
Conduin direc e c'hine
Dimeus a droat Mene Sion
Betec an tu deo d'e dron.

Neuse e c'houlle an aëlez
O laret an eil d'eguile
Piou'ta e ar feumelen man
Da gad en êv ar plaç quantan.

A sav splant divoar an douar
Caër ha caër evel al loar,
Unan vel an heoul biniguët
En touez quement zo crouet ?

Mez da satan ha d'e aëlez !
Gloar d'ar Voerc'hes ha d'e arme !
Serpant torret eo dit da benn,
Dre vertu sacr eur feumelen.

O burzud a repoussañ
Pa antre an Arc'h Allianç
Ar c'henta vo goude Doue
En renq ar sent hac an aëlez.

Ne voa quet achu an tri de
Mac'h ordren Jesus d'e aëlez :
Et, et, eul legion timat
Cant ma Mam da ve Josafat ;

Ma vo gret gouél curunamant
Ma Mam Sacr solannellamant
Rac ar vam e deus ma ganet
Ne vo biquen bouet d'ar prênet.

En creïs ar gan meulodius,
E resuscit Mam Sacr Jesus ;
Ha diguemeret en êuvo
Gant meulodi ha triomfo.

Silanç, eme'n Tad Eternel,
Oll sperejo celestiel,
Silanç, abeurs guir vab Doue
Ha speret eil hac eguile.

Gant an tri ferson an Dreindet
E zeo Mam Jesus curunet
Dirac ar sent hac an ælez
E zeo curunet Mam Doue.

Receo a ra eur gurunen
Hac eur gallout so souveren :
Privilech Mari so unic
Hac eus eur guenet manific.

C'houi so carer c'hentan degre
D'an tri ferson so en Doue
Priet oc'h d'ar Speret Santel
Mam d'ar Mab, Merc'h d'an Tad Eternel.

C'houi so bet concevet divlam,
Bêvet dibec'h ha pur ha flam ;
Goerc'hes bepret ; mam cousgoude
Mes ive mam dun den Doue.

C'houi so Rouanes an êuvo
Renet voar guement tra so
Dre c'hraç Doue ho tomany
Vo voar bep mad vel e hini.

Voar an ilis so en êuvo,
Voar ar re a souffr er flammo,
Voar an ilis santel Romen
Ho pouer a vo souveren.

Flem satan a vo dinerset,
pa vo ho hano prononcet ;
Confus, mezec en em denno
Diçous quement den o pedo.

Goerc'hes Vari nin ho salut
Princes an ælez hac an dud
C'houi e perlesen ar bed man
Goude Doue ar barfetan.

Clevet hon eus oll quelo mad
Abeurs hon tad santel ar Pap
Gret a vezo curunamant
Imach Mari en ker Goengamp.

An eizvet a vis guengolo
E vo celebret en hon bro
Eur gouel n'eo biscoas c'hoarveet
En hon touez nin Bretonet.

Cresquet ho ruio Goengampis
Cresquet plaç kær hac oc'h ilis,
Gret d'ar Voerc'hes un tron uel,
Vel m'en desir ar bopl fidel.

Rac calon vad ar Vretonet
A deui en foul ha gant respet,
D'enorin o Mam douç Mari,
Patrones ar Vretoneri

Clevet eo en pep lec'h ar vrud,
Dridal a ra calon an dud,
Gortos a reont gant hirnez
Goëlet curunin ar Voerc'hes.

Hanter cant mil a bep renq tud
A hast donet d'offr an tribut
A enor hac a veulodi
D'ho mam Sacr ar Voerc'hes Vari:

Dre bep ru e c'hantre en kær
Beleyen gant croas ha banier,
O canan voar ar c'haëron ton
Lætani hon Mam, hon Itron.

O virgo pura immaculata
Sine ultâ labe concepta :
Mari concevet pur ha flam,
Pedet evidomp, c'hui e hon mam.

An oll a dalc'h eur postur
Hac humbl ha devot dreist musur
Quemeromp evit testo mad
Daëro dru o daoulagat.

Urzet e ar prociſſion
Evit contantin devotion
An oll bélerinnet santel
A c'horto an heur solannel

Ma vo placet ar gurunen
D'æ mabic Jesus voar e benn
Ha d'imach e vam e hini
En creis mil ha mil meulodi

Ælez, arc'hele ar bed mân
Gant oc'h ornament caëran
A ro d'hon Escop assistanç
Da gurunin gant revevanç.

Imach Jesus, imach Mari
Dirac eur bopl bras o pedin
Gant fe ha gouir devotion
Hac eur joa pur en o c'halon.

Autro'n Escop heman vœzo
Unan eus ho caëran deïo,
Abeurs ar Pontif Souveren
Reïn d'ar Voerc'hes e c'hurunen.

Ho tillat sacr a luguerne
Mu c'hoas ar santimant a fe
A gondue ho torn santel
Da gad hon Mam spirituel.

Pa leret d'he mab da guentan
Mèn ro dac'h deus eus an aour paran
Ar gurunen man temporel
Roït dimp-niïn unan eternel.

C'hui ive, Mam Sacr Jesus
C'hui hon Mam douç trugaveus,
Vel m'o curunomp er bed mân,
Obtenet dimp ar faveur mân :

Ma vezomp curunet un de
Dre visericord hon Doue ;
Râc en esperin a reomp,
Hon Mam, mar pedet evidomp.

Acha e ar ceremoni,
En aannonç ar er soneri
Dimeus ar c'hleyer, ar bourdon
Hac eur vole tenno canon.

Aman c'hoas ar music
A ra un effet manific
Voar galon an assistantet
Ha quement al voar o speret.

Regina cœli alleluia
Ora pro nobis Maria :
Pedet Rouanes an êvo
Pedet vit ho pugalego.

Autro person, prestat sermant
Dirac quement den so presant,
N'o devo biquen quen empli
Curunen Jesus ha Mari.

Nemert evel m'en deus scrivet
Hon tad santel Pius Navet
En eur accordin doc'h ilis
Eur faveur dreïst da bep sort pris.

Refus a ra ma speret d'ïn
An ners ar gallout da bentin
Ar joa vras, an devotion,
Pa ziblaç ar prociſſion.

Da zigaç imach Mam Doue
Eus a blaç kær d'e zron neve
En creis an daëro arc'hantet
A scuil douç an assistantet.

Diguemeret eo en e zy
Imach hon Mam douç Mari
Ecensin ra an esquibien
Ar Voerc'hes gant e c'hurunen.

Chetu eur squeuden en hon bro
Dimeus ar pez a ouë en êvo
Pa ouë ar Voerc'hes curunet
Gant tri ferson an Dreïndet.

Trugarez dac'h mac'h oll vrois,
Da guentan d'an dud a ilis
Ha d'ar bopl ha d'an dud jentil
Ha da bep clas eus ar civil:

Hanat e zomp gouernet
Gant eur prinç predestinet
Da reparin hon maleurio,
Ha da dizec'han hon daëro.

Graç dean da gad buez hir,
Evit bonheur e oll ampir
Ma rêi cresquin en hon touez
Ren Doue ha ren ar Voerc'hes.

Euor d'an outro mair Goengamp
En deus laret publicamant :
Vije torret e isili
Arauc noaz'bet d'imach Mari.

Mes mez sur d'ar protestantet
Ha cas d'o doctrin milliguet
Pa dreusont ar Vretonery
Ø trong coms eus hon Mam Mari.

O Mam Jesus hon Mam santel
Nin o meulo bete mervel,
Pa veflomp en hon agoni
E lerfomp : Jesus ha Mari.

Pedomp Jesus, pedomp Mari
D'ober d'imp oll perseverin
Er justic'hae er santelez
Bete ar fin eus hon buez.

Ma effomp un de da repos
Dre c'hraç Doue d'ar Barados,
Dre verit Jesus hon Salver
Ha dre sicour hon Mam dener.

PLACID MARI GUILLERMIC,

Chaloni ha Person en Bear.



Propriété.

1 fr. 25 le cent.

Moulet gant **AR GOFFIK**, e Lann-Huon.